

D'ar 26 a viz Here

- E 108, merzherenti sant Evarist, pab war-lerc'h sant Klemez, da vare an impalaer Trajanus.
- War-dro 250, e Nikomedia e Bitinia, merzherenti ar sent Lukian ha Markian,. Hudourion e oant hag enebourion ar gristenion a-raok bezañ gonezet d'ar feiz. Kondaonet e voent da vezañ losket ez vev da vare heskinadeg Decius evit bezañ tremenet eus lezenn an impalaer d'al lezenn gristen.
- E-kreiz ar IVre kantved e Kartaga en Afrika, da vare an impalaerion Decius ha Valerianus, merzherenti ar sent Rogasian, ha Felisim, beleion. Meulet int bet gant sant Kiprian en e lizher d'ar gristenion heskinet.
- E 664, sant Sede, eskob e Bro-Saoz, breur sant Sead pe Chad. Desavet e Landisfarn dindan sant Aedan, e voe urzhiet gant sant Finian. Abostolour Saksoned ar Reter e varvas diwar ar vosenn en abati Lasingham en doa diazezet er Yorkshire.
- Er bloaz 760, sant Kutberzh, arc'heskob Cantorbery. Stourm a reas a-enep direizhderioù kloer Bro-Saoz hag e reas war-dro savidigezh ann iliz-veur nevez. Kenskrivañ a rae gant sant Bonifacius Maenz.
- E Breizh, er Vvet pe er VIvet kantved, sant Alor, pe Aler pe Taler, eskob Kernev war-lerc'h sant Konogan.
- Er VIvet kantved, sant Meliav, roue merzher. Hag eñ mab Buzig, tiern Kernev, tad sant Meler, pried santez Aourell e voe drouklazhet gant e vreur Rivaod.
- D'an hevelep deiz, en Iwerzhon, sant Bevan, manac'h, santez Caol, maouez santel.

D'ar 27 a viz Here

- War-dro 304, e Kappadokea, da vare Diocletianus a rene er Reter, merzherenti ar santezed Kapitolina ha Erotheid he servijerez, a voe andishaet o-div a-gevret.
- E 304 en Avila e Bro-Spagn, da vare Maximianus a rene er C'Hornôg, merzherenti sant Visant, hag ar santezed Sabina ha Kristel.
- War-dro 360, ganedigezh en neñvoù sant Frumañs, eskob kentañ rouantelezh Aksoum. Genidik eus Tyr e Fenikia e voe skrapet gant preizhaterion war un dro gant e vreur Edesios. E lez roue Abysinia e voe prizet Frumañs a zeuas zoken da vezañ arboeller ar palez. Mont a reas da gaout Atanaz, henaour Aleksandria, en belegas hag e voe eskobet.
- Er IVre kantved, merzherenti sant Jenitor (Lt Genitus ; Gg Génitour). Edo o tont eus Teurn lec'h ma oa bet badezet gant sant Varzhin a-gevret gant e dri breur, Meser, Tridor ha Principin pa voe lazhet war vord ar stêr Cruesa (Creuse).
- E hanternoz enez Vreizh (Bro-Skos), war-dro 563, distro da Zoue sant Odhran pe Otteran. Heuliañ a reas sant Koulmkell da enez Iona.

D'an 28 a viz Here

- Gouel ar sent Simon ha Yud, Ebestel. Anvet e vez Simon ar Zelot pe ar Gredus moarvat dre m'edo er strollad a zouge an anv-se hag a oa stag ouzh beli beleion Israel. Yud, breur Jakez, lesanvet Tade, en doa goulennet ouzh Jezuz perak edo oc'h en em ziskuilhañ d'an Ebestel nemetken ha n'eo ket d'an holl. Hervez hengoun an trinubium e vefent mibion Mari Kleofaz, merc'h santez Anna ganet eus he eil dimeziñ gant Kleofaz, breur Jozef.
- E 258, e Roma, merzherenti santez Kirilla. Dre ma fellas mirout he gwerc'hded hag he feiz e Jezuz Krist e voe dic'housouget da vare an impalaer Claudius.
- War-dro 670, e Melda (Meaux), sant Faron pe Burgondofaro - o talvezout Faron ar Burgondad, eskob. Edo gant e wreg Blidechild e lez roue Aotrasia pa zibabas, levezonet gant he c'hoar santez Fare, mont da veleg hag e wreg da leanez. Ur wezh diuzet da eskob e tegasas kalz madoù d'e eskobiezh, e savas parrezioù hag e skoazellas ar manatioù. Diazezañ a reas abati ar Groaz Santel a zougas war-lerc'h e anv. Hervez e sentvuhezour Hildegair e tegemeras "menec'h skos" evel sant

Fiakr ha sant Killian. Roet en dije e anv da barrez Treveron, nepell eus Dinan, en eskopti Sant-Mac'hloù, lec'h ma gaver ivez feunteun sant Fiakr.

- E Breizh, er VIvet kantved, santez Libouban, intañvez, mamm sant Goneri, diskiblez sant Tudual, penitiourez e Plougreskant e Bro-Dreger.

- E Breizh, sant Yud, abad Taorieg e Bro-Naoned; santez Mona, leanez.

- Er bloaz 714, sant Dorbaine, manac'h en enez Iona.

D'an 29 a viz Here

- Er bloaz 212, merzherenti sant Nacisius, eskob Jeruzalem. Kozh-kenañ e oa pa voe anvet eskob hag e vevas betek e gant trizek bloaz o tiskouez santelezh ha dalc'husted en amprouennoù.

Kadoriañ a reas Senez Palestina a zivizas lidañ Pask d'ar Sul ha neket da geñver pennbloaz ar 14 a Nisan. Hervez Euzeb Kaezarea e voe lazhet dre ar c'hleze.

- En IIIde kantved, e Kartaga, merzherenti sant Felisian.

- E 304, e Sidon e Fenikia, merzherenti sant Zenob, beleg, ha Sz Zenobia he c'hoar. Da gentañ mezeg ez eas da veleg hag e voe harzet gant he c'hoar da vare heskinadeg Diocletianus. Dre ma nac'hent dilezel o feiz e voent splujet en dour berv ha dibennet o daou.

- E 366, en Edessa e Siria, distro da Zoue sant Abramioz, penitiour, a voe meulet gant sant Efrem.

- Er VIIIvet kantved, santez Mamm Anna, anvet Eufimian, kehelet gant Ilizoù ar Reter. Ganet e Bizantion, e voe ur pried eurus, dezhi daou vugel. Intañvezet abred, e kollas ivez he bugale. Mennet da heuliañ alioù an Aviel er vuhez vanac'h, en em ginnigas d'ur manati o tiskleriañ e oa tizhog. Dre he buhez skouerius e c'hounezas fiziañs an holl kement ha ma voe fiziet enni ur manati nevez gant an Henaour Taraez. Hogen e rankas en em dennañ dre ma voe dizoloet he hennadelezh wirion.

- En XIIvet kantved, sant Abraham, abad Rostov-Veliki etre Moskov ha Iaroslav Rusia. Ganet en un tiegezh pagan c'hoazh e Galitch e voe gounezet d'ar C'Hrist hag ez eas da vanac'h goude bezañ distrujet skeudenn an idolenn Veles. Diazezañ a reas manati an Teofaniezh.

- E Breizh, er Vvet kantved, sant Euzeb ha santez Lanwenn, tierned e Breizh, kerent santez Koupaia, mamm sant Tudual.

- En Iwerzhon, war-dro 632, sant Colman Mac Duagh, eskob. Manac'h e oa o vevañ gant un diskibl pa voe eskobet en despet dezhañ. Sevel a reas manati Kilmacduagh.- En Iwerzhon c'hoazh, sant Luran, manac'h.

- Treuzlec'h relegoù sant Erwan.

D'an 30 a viz Here

- Er Iañ kantved, merzherenti ar sent Tertios, Mark, Justus hag Artemas, eskibion. Hervez an hengoun e oant izili eus strollad an Dek ha tri-ugent Diskibl Jezuz hag e varvjont e peoc'h an Arloz goude bezañ douget bri da Zoue dre o c'homzoù hag o oberoù.

- En eil kantved, ganedigezh en neñvoù sant Flour a voe unan eus abostolourion gentañ Bro-Narbonna ha Bro-Akwitania, a echuas e vuhez er gêr a zoug abaoe e anv.

- E 298, e Tanger e Maoretania, merzherenti sant Marsel. Kantener el lu roman e voe dibennet dre m'en doa disklêriet e-pad gouelioù an impalaer e oa ur c'hristen ha ne c'helle ket servijout ken diouzh leoù ar soudarded dre ma ranke servijout Jezuz-Krist, Mab an Doue hollc'halloudek.

- War-dro 540, e Campania, sant Jermen, eskob Capua. Kannad ar pab e Kêrgustentin da vare an impalaer Justinian evit klask adunaniñ ar C'Hornôg hag ar Reter. Mignon bras e oa da sant Benead a welas hervez Godescard da geñver e dremenvar e ene douget d'an neñv gant aeled en ur c'helc'hiad tan.

- E 655, e Foosse e-kichen Namur, merzherenti sant Follan (Lt. Fullanus, Gl. Foillan), breur sant Fursa abad Lagny hag Ultan, Iwerzhonad, merzheriet e Soignies e Belgia. Da gentañ e prezegas an Aviel e Bro-Saoz ha da c'houde en hanternoz Gallia, er Brabant pergen. Lazhet e voe a-gevret gant tri c'heneil gant torfedourion. Burzhudoù a c'hoarvezas kerkent war e vez.

D'an 31 a viz Here

- E dibenn an IIIde kantved, dindan vMaximianus er pagus Viromandensis lec'h m'emañ kêr Saint-Quentin hiziv en hanternoz Bro-C'Hall merzherenti sant Kentin (Lt. Quentinus), beleg. Patrom ar boderion eo. Ur romanad e oa, deuet gant sant Lukian eus Bellovacum (Beauvais) da A\$avielañ Gallia. Kar e oa da santez Benedikt ha santez Yolen eus Roma.
- E 994 e Ratisbon e Bro-vBayern, distro da Zoue sant Wolfgang, eskob. Da gentañ manac'h beneadat e Kêr-Einsiedeln e voe diuzet eskob Regensburg hag e roas ul lusk nevez d'ar vuhez kristen o teurel evezh ouzh stummidgezh ar gloer.
- E 1272 e Cahors, ar gwenvidig Kristof a Romagnola, beleg eus Urzh ar Vinored. Kaset e voe eno gant sant Frañsez hage varvas da gant vloaz goude bezañ labouret kalz evit silvidigezh an eneoù.
- E Breizh, er VIIvet kantved, sant Gwallon, abad, diazeour abati Lanvolon.
- E 686, sant Ultan, abad Péronne, Iwerzhonad, breur sant Follan ha sant Fursa.
- Er VIvet kantved, sant Herec'h, breur ar sent Euni (pe Ewin), Herec'h ha santez Yae, abostolour an Devnoniz war enez Vreizh (Kernev-Veur, Devon...).
- Diazeziged abati kisterkian ar Pedennoù e Beler e Bro-Muzilheg en eskobiezh Gwened.

D'ar 1 a viz Du

- Gouel an Holl Sent. Gant ar gouel-mañ e eñvorer war-un-dro engroez ar vadezidi a gement gouenn, yezh, broad heñvelaet ouzh Doue da virviken gant ar C'Hrist, ar Sant Nemetañ. Abaoe ar pevare kantved e veze kehelet ar verzherion santel gant Iliz Roma. War-dro dibenn ar seizhvet kantved e voe degemeret ganti lidañ an holl sent war-un-dro, diwar levezon an ilizoù kelt. En ilizoù bizantat e vez lidet an holl sent d'ar Sul goude ar Pantekost.
- Er Iañ kantved, da vare an impalaer Vespasianus, merzherenti santez Eponina eus Langres. Gallianez e oa eus meuriad al Lingoned hag e oa deuet da vezañ kristen. Harpañ a reas he gwaz, an ofiser roman Julius Sabinus, en doa kemeret perzh e 79 en emsavadeg Civilis a enep Roma a voe trec'het gant ar Sequaned kevredet gant ar Romaned. Neuze ez ejont da guzhat o-daou en ur c'hroc'h lec'h ma c'hanas o gevelled. Goude bezañ diskuliet e voent harzhet ha lakaet d'ar marv.
- En IIIde pe IVre kantved, sant Aostremon (Lt. Austremonius pe Stremonius), eskob Clermont en Arvern. Bez' e vefe ur Yuzev, ganet e vije bet e Emmaus, deuet da vezañ beleg e voe kaset eus Roma gant an diagoned Marius, Anthemius, Mametus, Nectarius ha Seronatus da avielañ Gallia. Sant Privad a vefe eus e ziskibion.
- Sant Pirieg, eskob e Leon.
- Er VIIvet kantved, sant Postan (Gl. Potentin), abad, diskibl sant Koulman Veur. Diazezañ a reas ur minic'hi e-kichen Matignon nepell diouzh Dinan.
- Er VIvet kantved, mibion Brec'han : sant Pabiabili, aet da brezeg an Aviel en Iberia (Bro-Spagn) ; sant Dingad, penitiour e bro Mynwy war enez Vreizh (Kembre) ; sant Kledwen, penitiour e bro Brycheniog (Kembre).
- Er VIIvet kantved, sant Keizno, a savas un iliz e Llangeith e bro Aberteifi e Kembre.
- En Iwerzhon, santez Ailltin (Aotin) ha santez Kuñv (Iw. Caomh), santez Fionntaine, maouezed santel.
- C'hoazh e Breizh, ar pac'hiad Salaün, lesanvet ar Foll, penitiour, XIV vet kantved. Hervez an hengoun e voe da gentañ manac'h e Landevenneg kent mont da benitiour en un treuzkoad e-kichen Lesneven. Goude an oferenn pemdeziek ez ae a di da di o c'houlenne e vara en ur lavarout: "Ave Maria, Salaun a zebrfe bara!" Goude e varv didrouz d'ar 1añ a viz Du 1358 e voe sebeliet e-kichen ar wezenn en doa kavet bod enni. Nebeudig goude avat e voe gwelet ul lilienn o kreskiñ war e vez gant he daredoù o stummañ ar gerioù Ave Maria hag o tont eus genoù Salaun. Ar burzhud a zesachas engroezioù hag e voe savet ur chapel a voe lakaet da iliz chabistr gant an dug Yann V e 1423.

